



AR

VORIANEZ

gand

AB-SULIO

Moulez ru ar C'hastell, 4 — Brest.



AR VORIANEZ

Allegretto War don : Ar pilhaouer

A - ma, pell e - barz an har - lu, em eus
ran - ket di - me - zi, Em eus ran - ket di - me - zi, Da eur
vo - ri - a - nez ker du Hag es - kell ar gwen - i - li. *Diskan,* Mat, mat,
mat, pe - tra faot de - oc'h, Pa ne ga - van ket gwel - loc'h !

The musical score is written in G major (one sharp) and 2/4 time. It consists of four staves of music. The first staff begins with the tempo marking 'Allegretto' and the title 'War don : Ar pilhaouer'. The lyrics are written below the notes. The second staff continues the melody. The third staff includes the instruction 'Diskan,' above the notes. The fourth staff concludes the piece with a double bar line.

1

Ama, pell e-barz an harlu,
Em eus ranket dimezi, (*diou wech*)
Da eur vorianez ker du
Hag eskell ar gwenili.

Diskan :

Mat, mat, mat, petra faot de-och, (*diou wech*)
Pa ne gavan ket gwelloc'h.

2

Ama n'eo ket 'vel e Leon,
El lec'h rak beza sparlet, (*diou wech*)
E ranker klask maer ha person;
Er vro-ma ne ranker ket.

3

Eur plac'h ouzoc'h o vouse'hoarzin,
 Na jomo ket da c'hortoz, (*diou wech*)
 Ar welladenn diouz ar mintin;
 An dimezi 'benn an noz.

4

Friko bras a oa da lounka;
 Lêz-kaoulet ha riz dre 'n dour, (*diou wech*)
 Pesket krazet da zizreinna
 Ha karantez meurbet saour.

5.

Va mestrezig a zo bihan,
 Bihan penn-kil-ha-troad, (*diou wech*)
 He dremm zo du 'vel kein eur vran,
 'Vel eur voarenn he lagad.

6

He bleo hirr, peur-du ha nezet,
 He dent gwenn 'vel ar c'hazarc'h, (*diou wech*)
 Hag he gouzoug, flour-dambleget
 Evel gouzoug eun alarc'h. (1)

7

Eun ty soul hep tamm siminel,
 Tri maen oc'h ober trebez (*diou wech*)
 Eur pod pri hag eur c'hoz skabel
 Eo holl vadou va mestrez.

8

Na ran forz deus ar gwall deodou
 Na van deus o c'homzou fall, (*diou wech*)
 Rak pa vez lac'het ar goulou,
 N'eo ket duoc'h vid eun all!

(1) Alarc'h = e galleg = cygne.

9

Da gouls ar pred ma he gwelfoc'h
 O c'hrizât he muzellou, (*diou wech*)
 Ledet keit, pe zoken, hirroc'h
 Eget re vare'h an ankou.

10

War ar plouz gwenn e korn an ty,
 Ni ra hunvreoù lirin; (*diou wech*)
 Dre ar prenestr, heol ar bleizi, (2)
 A zebiant ouzomp c'hoarzin.

11

En noz-all, hi am dihune,
 Va dihuna rê a grenn, (*diou wech*)
 Liesoc'h vid bep heur e save,
 Tro-war-dro din, da glask c'hoenr.

12

He me sevel en am goazez,
 Heb ober neb tammig trous, (*diou wech*)
 Kavout re din ouz va c'hostez
 Edo garin eur marmous.

13

Da c'houlou-deiz, me a zihun
 Ouz son an droumpilh kasaüs, (*diou wech*)
 O sonjal em dous deus Sizun,
 Ec'h en em gavan eürus.

14

Pa deüio va zro da gwitât,
 Ar vro-ma vid eur vro all; (*diou wech*)
 Me a gerzo, 'n eur c'hwitellât,
 Pell deus ar pennoù tenval

Madagaskar, 1908.

AB-SULIO.

(2) Al loar.